

**Evniñ Arvor** (Caurel François) : Plounevez-Kintin 1874 – Antony 1954)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

*Evid ober jistr mad e fell avalou mad* : ober a ra an oberour gand ar verb “felloud“ evel gand “falloir“ e galleg. Gwelloc'h e vefe bet skriva : *Evid ober jistr mad e vez red kaoud avalou mad*. Meur a wech e vo kavet ar “fell“-ze.

## Ar jistr

### Eur ger a-raog

En iliz koz eur bourk euz ar Menezioù Du e weler eur sant skeudennet brao war gein eur haro gouez. Ar skeudenn-ze eo hini sant Telo, eskob, deut euz Breiz-Tramor da avielañ e genvroiz diskennet e Breiz-Izel a-raog ar Zaozon<sup>1</sup>. Telo a oa leun e galon a garantez ‘vid an nesañ. Evid mad hemañ ne dehe dirag poan ebed : kerzañ a ree hep paouez dre ar Vro a-bez, o prezeg n’eus forz peleh, en ilizou koulz ha war ar mêziou, el lanneier, war ribl an dour. D’an noz, goude pedennou hir hag entanet, e kouske war an douar kaled, war ar mein zoken : se oll evid gonid da Zoue, dre ar binijenn, eneo e genvroiz ker.

Mez ar pezh a zere euz madou ar horv ne oa ket dilezet gantañ. Hervez ar gredenn goz a zo e-touez ar Vretoned, sant Telo eo an hini a reas eun avalenneg<sup>2</sup> vraz euz ar gaerrañ, e bro Dol.

Siwaz, anaoudegez vad an dud a zo berr ; paotred ar gwez-avalou o-deus kollet pell ‘zo ar soñj euz ar sant madelezuz ; eur pirhirin bennag hepken, hag an dud vahagnet pe gwasket dindan trubuillou poaniuz ar bed, a ya c’hoaz da weled e arched mein. E istor nan eo ken miret nemed en eur leor buhez-sent koz bennag, a zigor c’hoaz a-wechou eur beleg galvet da ober pardon ar zant.

\*

A-bell ‘zo eta e reer jistr e Breiz, pan eo gwir e veve sant Telo er hantvejou kentañ goude donedigez on Zalver. A-drugarez Doue, avalou a zo e Breiz ar bloaz-mañ ; ar gwez o-deus bet o beh, pezh a hellent dougen. Jistr a vo eta ! Mez bezañ ‘zo jistr ha jistr : beteg ober, greom hini mad.

Soñjet am-eus, lennerien ger, skrivañ eur pennadig diwar-benn an doare da ober jistr. Kredi ‘ran e vo degemeret mad, ha laouen e vin mar am-mo gallet servij unan bennag euz lennerien vad *Kroaz ar Vretoned*.

### An avalou

Evid ober jistr mad e fell avalou mad. Ar re dous hag ar re hwero eo ar gwellañ. Jistr avalou treñk a zo skildreñk, gwan, ha dui ‘ra raktal m’eo avelet. Galloud a reer, koulskoude, o meskañ gand an avalou all, mez pemp litrad dre gant hepken ; mar bez muioc’h, ar jistr, a vo evel eoul, ha ne vo mad nemed ‘benn ar bloaz war-lerh. Evid ma viro ar jistr e vlaz hag e hwez vad e-pad pell amzer, e tleer hen ober gand avalou dous ha c’hwero hepken, a bep sort, mar dint dare mad. An oll avalou-ze a ra eun evaj mad.

Lezom an avalou treñk. Koulskoude, gand ar re anvet *kazo* c’hwero, a-wechou e reer jistr nerzuz ha blazet mad. Ar sort kazo-ze a gaver dreist-oll e bro Loudiag.

Amañ e roin deoh eun ali mad, lennerien ger. Pa vo kichenn lakaad plant-avalou, na gemeret ket ar re gentañ a gaver er marhad, na kennebeud ar re ‘vo kinniget deoh evid an izellañ priz. Nan eo ket zoken d’ar marhad e tleer mond da glask plant-avalou. En em erbedet d’an hini ema e vicher dizevel plant ; laret dezañ ober eun dibab euz ar re dous ha c’hwero, hag, en o zouez, ar re founnusañ.

An avalou a dle bezañ dare mad. Ar re nan int ket tre a ray jistr hag a duo dioustu ma vo avelet ; ouspenn, koll a ray buan e vlaz hag e hwez vad. Ar jistr-se c’hoaz n’en em viro ket.

An avalou glaz a ra jistr fall. A-raog o lakaad er vilin, e fell gortoz ken na vint dare mad. Ar gwellañ doare eo o zerri beb ma kouezont war an douar ; o lezel neuze en heol, e berniou tano war plouz seh ha digailuz<sup>3</sup>.

<sup>1</sup> a-raog ar Zaozon : n’eo ket gwir. En amzer ar Romaned e oant deut.

<sup>2</sup> avalenneg : eur parkad gwez-avalou.

<sup>3</sup> digailuz : digailar.

An avalou *brein* ha *du* nan int ket med da deul<sup>4</sup> war an teil ; pa nan int ket du e raint a-wechou jistr mad, mez ouspenn eo gwan ha disliv, n'en em vir ket pell.

Kalz a zo da ober war-dro an avalou goude ma 'z int serret. Ar bern a dle bezañ greet e leh nan eus na mouestadurez, na c'hwez fall ebed. Ne dleer ket o berniañ en eul leh kloz, rag an avel ne erru ket eno. Jistr greet gand avalou bet klozet a vo 'vel eoul ha blazet fall.

Mar bez louz an avalou, eo red o gwalhi gand dour red pe dour andon. Evel-se, o lakeer war glouejou hag e skuiller an dour war ar frouez. Ne fell ket lezel an dour da 'n em zilañ en avalou : er hiz-se e kollfent o nerz ; se a arruo mar dint trempet ha lezet pell 'barz an dour.

Goude ma'h int gwalhet, e fell o ledañ war ar plouz da zehi ha da heoliata.

Avalou skornet eo mad gortoz eiz deiz a-raog ober jistr gante, ha c'hoaz ar jistr n'en em viro ket pell ; disliv e vo ha nebeud a vlaz dezañ. Gand ar sort avalou nan eo ket mad meskañ dour : dour a-walh a zo en avalou skornet !

An avalou na vezont ket a-wall o chom er-mêz, mar dint diwallet ervad ouz ar skorn. Evid se e fell goloi aneze gand plouz e-pad an nozveziou yen, ha d'an deveziou heol, o dizoloi, rag, mar ne vint ket dizoloet, e tommint hag e vint a-wall.

### **An dour da ober jistr**

Ar peurvuiañ, ne daoler ket evez war stad an dour. An oberour jistr, heñvel ouz e vestr koz, a gemer bep sort dour : oll int mad evitañ, an hini tostañ ar gwellañ ! Ola ! ola ! Eun den poelleg, eun den hag a fell dezañ ober labour vad, ne ray ket evel-se ! Kemer a ray dour sklêr, a red. Dour glao eo ar gwellañ dreist-oll, ne fell ket ankouad se ; dour feunteuniou pe dour puñsou a lak ar jistr da veza kaled.

Pegement a zour a fell lakaad d'ober jistr ? War ze, an oberourien o-deus kalz a zoareou disheñvel. Eur re a heuill eur soñj greet pell 'zo, eur re all, hervez ar pezh o-devez gwelet ober a-viskoaz, heb goulenn digante o-unan, perag se ; darn c'hoaz a lak kalz a zour war digarez ober eur gounid brasoh. Jistr hanter-vad ne dalv ken komz amañ. Re a zour a wan ar jistr. Mar bez lakaet dour hervez ar gwir vuzul (5 litrad dre gant), ar jistr a vo mad-tre, dudiuz, maguz pe nerzuz ; terri a ray ar zehed, laouennaad a ray ar galon ha mired a ray ar yehed - mar bez kemeret gand muzul !

Galloud a reer ober jistr heb dour, mez neuze eo red meskañ an avalou gand goell : bep sort avalou dous gand eun drederenn ha re hwero a ra jistr deuz ar gwellañ.

Evid kaoud jistr kreñv hag en em viro mad, ne fell ket lakaad muih evid 5 litrad dre gant ; ma vo ouspenn 5 litrad, ar jistr a vo gwan, yen ; red e vo hen evañ er bloaz, rag kleñvejou a zeuio dezañ buan.

Ar bloaveziou avalou nan int ket heñvel. Pa vez seh an hañv hag ar penn kentañ euz ar hoz-amzer<sup>5</sup>, eh haller lakaad muih a zour d'ober jistr ; kreñv a-walh e vo, rag "alcoool" a zo diosutu er frouez, er bloaveziou-ze.

En eur ger, gelloud a reer lakaad dour, mez an nebeutañ eo ar gwellañ evid m'en em viro pell ar jistr.

Jistr avalou treñk na houl ket dour.

### **Ar plouz**

An avalou, koulz hag ar frouez all, a vez a-wall pa vezont e-touez traou louz, *dreist-oll goude ma'h int malet*. Dleet eo 'ta taol evez war pe stad eo ar plouz a dibaber d'ober an dorchenn. Plouz kerh pe plouz gwiniz eo ar gwellañ. Mar 'n-eus bet an ed eur hleñved bennag, nan eo ket mad mond da gemer plouz an heveleb ed.

### **An tonellou, pe barrikennoù**

Amañ e laran d'an oberour jistr : bezet tonellou mad ha kreñv ; skarz et aneze 'dalv ma int goullonderet, ha c'hoaz a-raog o hargañ. Ankounaoud a reer se aliez !

Gret ouspenn : gwalhet ho tonellou gand raz. Lakaad a ra da distrempañ e-barz dour bervet (1 lur 'vid eur varriken), ha gwalhet mad gand an dour-ze, ha gand dour yen goude. Bezañ 'zo re hag a walh o zonellou gand dour en hini<sup>6</sup> o-deus lakaet lore ha souffr. Se a zo fall, rag al lore a ra d'ar jistr eur blaz mel, an hini<sup>7</sup> ne blij ket

<sup>4</sup> da deul : da daol.

<sup>5</sup> ar hoz-amzer : an diskar-amzer.

<sup>6</sup> en hini : e pehini, er skrid orin.

<sup>7</sup> an hini pehini er skrid orin.

d’an oll. Koulskoude a-raog chañj tonell d’ho jistr, poazet eur boughenn souffr, hen dalhet en ispill dre doull ar bond (pe ar stoufell) : pep blaz ha pep c’hwez fall a yelo kuit.

Muioh eo braz an donell, gwell pe well eo ar jistr.

### Ar waskerez

Ne vern pe waskerez, oll int mad. Felloud a ra hepken taol ple mad evid ma vo kempenn an diou daolenn etre ar re<sup>8</sup> ‘vez an dorchenn. Mad e ve e vefe greet taolennou ar waskerez gand koad fao.

### Ar benton

Mad e’ kaoud en tu a-raog hag eun tammig izelloh ‘vid taolenn ar waskerez, eur benton vein da zegemer ar jistr a ziver euz an dorchenn. Ar bentonou koad a zo diêsoh da derhel kempenn, ha, mar o-deus eun tech fall bennag, ar jistr ‘vo a-waz euz se.

### Ar vilin-avalou

An araokaad, pe ar “progrès“ ‘vel ‘lavar ar Hallaoued o-deus ledet dre-oll bep sort mekanikou da valañ avalou. Mez ar gwellañ c’hoaz – daoust d’ar “progrès“ ha daoust ma ray goap ouzin, marteze – ya, ar gwellañ eo ‘oa *ar valerez vein*, a weler bremañ dilezet war al leurgêriou, pe en krap ouz ar rojou. Seblantoud a ra din kleved paotred ar “progrès“ o houl diganin : « Perag ‘ta, en da valerez koz, da valerez vein, ar gwellañ ? » - Respont : « Ar gwellañ eo da genta : abalamour an avalou, heb bezañ trohet, *a vez malet*, en gwirionez, dreist-oll kig an aval hag a ra d’ar jistr e liou kaer. D’an eil : ar *plus* (pe *had*), o vezañ ma vezont flastret dindan pouez ar valerez vein, a lak ‘barz ar jistr eur hwervoni an hini a zere mad d’an evaj, hen sikour da vervañ, a ra dezañ eur blaz mad hag hen lak zoken da boazañ gwelloh e poull ar galon. D’an trede : ar valerez vein a zo êzetoh da derhel kempenn, ha daoust ma koust kerroh, e ra dihaou, rag eur jistr gwelloh e kement stumm a zo, a vez greet ganti.

Pa vez hanter-valet an avalou, ‘vez laket an dour e-barz ar valerez vein (5 litrad dre gant), hag ar jao a drey ar min-milin ken a vez peurvalet an avalou. Et da lakaad an dour evel-se en eur valerez giz nevez, paotred ar “progtès“ !

### Eildonellidigez ar jistr

Mar fell deoh e viro ho jistr e vlaz mad, eildonellet hañ, da lared eo, chañchet barrikenn dezañ goude m’endeus bervet. Mesket ho jistr, gwell e vo. Nan eo ket diêz ober al labour-ze. Lakaet beb a gelorn dindan eun teir pe beder donell war an dro, pa vint leun goulonderet aneze er memez tonell, ha pa vo leun ar gentañ barrikenn, gret kemend-all d’an tonellou all, beteg an hini diwezañ. Er hiz-se ho-po jistr euz an dibab, jistr hag a vo fresk goud daou pe dri bloaz.

### Ar hao

Ar jistr ‘dle bezañ laket en eul leh fresk, heb bezañ mouest : leh ne dremen ket an avel ha kuit a hwez fall. Ar barrikennou diazezet war beuliou koad pe war vein, eun tammig a-uz d’an douar.

### Jistr en boutaill – “Jistr pifet“

Pa’h eo greet ar jistr ha pa en-deus bervet tre, eo eun dra vad hen lakaad en boutaill. Ar boutaillou pri ‘zo gwelloh ‘vid ar re gwer, freskoh int. Ar voutaill stouvet mad a vo lakaet ‘n he sav, eun tammig war gostez. E peb boutaill eo mad lakaad eur hreunenn rezin poazet e-barz ar sukr ; ar hreunenn-ze a vir ar jistr dous.

Mar fell deoh kaoud jistr eoneg, jistr hag a zaillo - “*jistr pifet*“ – ‘vel kare ken brao din eur mignon mad – n’hoh-eus ket ‘med dibab gwellañ jistr an dorchenn (hini an eil taol), hen lezel da vervi eur pemzeg deiz bennag, hag hen lakaad goude en boutaillou kreñv (re bri, mar gallet). Stouvet mad, ereet ar stouv ha lakaet ho poutaillou en eul leh fresk : neuze ‘vad ho-po “jistr pifet“ !

Pa zeuio eur mignon mad bennag da vale d’ho ti, c’hwi a dispako eru voutaillad jistr d’hen degemer. He lakaad a refet war an daol gand lorh, hag ho mignon, d’e dro, a laro gand Taldir ;

« Jistr ar Breizad ‘zo jistr bevuz,  
Hennez a lak an dud nerzuz !

<sup>8</sup> ar re : pere, er skrid orin.

Jistr ar Breizad eo ar gwellañ  
‘Hallfed da gavoud er bed-mañ ! »

Greom ‘ta, kenvroiz ker, greom jistr melen mad. Hen evom en on festou, en on fardoniou.

Dilezom a-grenn ar evajou kreñv, ar re<sup>9</sup> nan int mad ‘med da ampoezonañ an dud ha da vezañ kirieg d’o dizenor.

Ya, evom on jistr alaouret, ha larom c’hoaz gand Taldir :

« Tankerru, hennez a oa mad,  
Me ‘mije evet deg podad ! »

---

<sup>9</sup> ar re : pere, er skrid orin.